

Dastumad Pennwern : dornskrid 89

## 50. CHARIVARI MARI KIGER

( follennoù 163 - 165 )

Na sillacuit hag e klefot hag e klefot kannan  
 eur chanson a zo kompozet a neve evid ar blos  
 Zo gret d'eun intanvez iaouank a ia breman da zimii  
 Abalamour dan draze kriomp charivari.

----

An intanvez man lavare eun dervez goude koan  
 Ma ne allan kaout Per ar goas gwen me a kollo kalz a  
 poan.  
 Rag enez a zo eun den lest hag ennez a plich din,  
 Abalamour d'an dra ze kriomp charivari.

----

An intanvez man lavare eun droad en tal al len :  
 Nag el leal, plac'h ar Marek, me am bo per ar goas gwen,  
 Rag ennes a zo eun den lest hag ennes a plich din,  
 Abalamour d'an draze kriomp charivari.

----

An intanvez man lavare en Penele pa errue :  
 - Debonjour dec'h, ma faeron, Setu me deud adare  
 Nag evid goulen konjes diganec'h da zimii :  
 A balamour dan dra ze kriomp charivari.

----

An intanvez man lavare pa voa e vond emez ar pors :  
 Pa meus bet konjes va faëron a breman me ne ran forc'z,  
 Pa meus bet konjes va faëron a breman da zimizi,  
 A balamour d'an dra ze kriomp charivari.

----

An otrou Penele a lavare a neuze de filiolez :  
 Nag el leal va filiores, goël e dec'h mond var ho poës.  
 Rag eur vech all e vo ar bed c'hoas o poa bed var ho  
 A balamour d'an dra ze kriomp charivari. fri.

----

An intanves man lavare eun de de plac'h iaouank :  
 An dud a lavar dime per ar goasguen nen deo ket koant  
 Mes ennez zo eun den lest hag ennes a plij din  
 A balamour d'an dra ze, kriomp charivari.

----

An intanvez man lavare e dont deus plass al lez  
 Nag el leal, plac'h ar Marek, mem bo eun habid n  
 bet en deus eun davancher tafftas eun hiviz Sile  
 A balamour d'an dra ze kriomp charivari

-----  
 Ar ça ta, Mari Kiger, me ho ped hag humblamant  
 Da kommer ar sourci ag ar vaneamant  
 Ne kredan ket e veffe mestres nemedoc'h en ti  
 A balamour d'an dra ze kriomp charivari.

-----  
 Ar ça ta, Mari kiger, a me o ped ive  
 Da kemeret ar souci dimeus ar vugale  
 Diou vinores a kret din a zo ebars an ti  
 Abalamour dan draze kriomp charivari.

-----  
 A c'houi, va bugaligou, a deuio goude se  
 Da eva peb a vanac'h da iec'het ho mouereb neve  
 A c'houi Per ar goasguen a Mari ar Kiger,  
 a effot peb a banac'h da iec'het o tud neve.

-----  
 VVVVVVVVVV

Jannet Fuill, klasqeres a henvik, 13 gwenver 1851